

# POBL VREIZH

3<sup>L</sup>

MEURZH 1978  
NIV. 98



Pobl Vreizh

*Bez e oa al labour-douar ur binwidigezh e Breizh betek newez zo : ha laosket e vo ar c'hapitalism d'ober e reus amañ ive, hag rediet ar  
beisanted da sentiñ doc'h lesenn ar arc'hant bras ?*

**HARPIT  
POBL VREIZH**  
KRP 2746-89 ROAZON  
CCP RENNES

☛ listennad

Par L. P. Sant-Brieg	20,00 L
Erwan L. Rouzon	20,00 L
Yves Le Talec, Tregou	10,00 L
Jakes R. Brest	20,00 L
Scapig F. Str. Quémén (02)	20,00 L
Youn D. Kanada	25,00 L
Erwan C. Comfores (16)	20,00 L
L'evreñh Goudeven, Treveven	20,00 L
Claudine L. B. Taverny (96)	10,00 L
Bernez L.F. Aler	30,00 L
Gaby M. Varakes	70,00 L
Dioroadur ar waok vrezhoneg war leor Vreizh en he kof: Alan G., Noeved	10,00 L
F. B., Fontenay-aux-Roses (52)	20,00 L
Yann M., Ploumagouar	20,00 L
Jakes Riou, Gwengamp	20,00 L
Jonel P. Brest	30,00 L
Jakes Beroñ, Jaki Arvor	20,00 L
Yann-Ber G., Brest	20,00 L
Jakes L. T., Paris	20,00 L
Mikael D., Rouzon	20,00 L
P. I. S. B., Paris	70,00 L
Mikael J., Gwengamp	20,00 L
Agnes B., Senaux (92)	20,00 L
Yves Le G. La Ferté-Albas (91)	20,00 L
Rhuz G., Fontenay-aux-Roses (93)	70,00 L
Elene B., Lannocq	20,00 L
Roye B., Lameuz (91)	20,00 L
Fañch D., Rennes	20,00 L
	750,00 L
Dizor ar listennadad all	5466,20 L
En holl	6221,20 L

War wellad eh a an traoù l 28 a dud o deus kaset tammou arc'hant da b'Pobl Vreizh ar marw. N'eo ket divalav tamm ebet - ne vez ket graet gant eus Pobl Vreizh tamm ebet !


Hebdoc'h, lennerion ha komanterion ger, ne c'hellomp ket kass Pobl Vreizh war raog, na, marvez, he delc'her en he sav. En ur gass delc' 6221 a lunoù en ur ober 9 vis, hoc'h eus profet delc' 700 L beb mis, pe dost, well-wazh. Ma talc'hit, e savo kast ar bloazvezh da 8000 L. Un drugar a vefe, rag gant ar komanterion hon eus, ne c'hellomp ket gortos kaoud en tu all da 30 000 L beb bloaz, hag e koust beb niverenn 4 000 L (un tammig ouzhpenn memañ). Setu, en ur larec' doc'h, ur wech ouzhpenn, TRUGAREZ, TRUGAREZ VRAS, e c'houlennomp stard diganeoc'h : KENDALC'HT DA HARPIT Pobl VREIZH.

Emorpp gant an rev. 98. He soñj hoc'h eus ev niverenn kentañ Pobl Vreizh ? Pebezh zharichant abaoe ! Ema an rev, 100 o tostaad. Ya, emañ Pobl Vreizh gant he 9 vloaz. Abaoe 9 vloaz ez eo bet deuet Pobl Vreizh ar maes, ingal beb mis. Soñjit ez eo Pobl Vreizh ur gelouenn bolitiek, embannet e brezhoneg penn-da-benn. Hag e chom en he sav ! Hag e talc'hit da vont war raog, da wellad !

Trugarez vras deoc'h ewid ho fealded, lennerion ha komanterion ger !

Pobl Vreizh

Ti-Moullerezh « Iroise »  
25219 Relag Kerhuon  
Rener ar gelouenn :  
Fañch Morvanou C. P. P. A. 50 091  
1700 skwerrenn



Eias ar c'hentañ eo bet kentañ meeting bras an UDB, dalc'het dindan kofu leurgêr al Lissou e Rouzon. Amañ G. Serrai, ar c'hener brudet, evel eus an UDB war ar memes tro, e kass an shadenm en-dro. Gwelit pelloc'h, p. 6.

**RADIO FRANKIS !**




Ne oa ket trawalc'h gant Radio UDB, hag hi o vont en-dro ur pennad zo. Bremañ ne deus an UDB he radio gant delc'heñ unan ; klevet e vez war MF 101 Mgh. Ar frankis da gomp he deus kemeret an UDB, heb goulnn nag ali nag aotre digant den. Klevet e vez beb eil devezh, da 19<sup>h</sup>, epad un 1/2<sup>e</sup>, e Brest ha 15 km tro-dro. Ne vez ket graet tamm gant ar frankis ! Beteghenn n'o deus ket kredet re ar gouarnamant mougañ mouezh ar frankis...

**KOMANANTOU**  
boutin : 30 L  
skoz : 50 L pe ouzhpenn  
dre garr-nij : 50 L  
estrenvro : 50 L  
KRP ROAZON 2746-79  
CCP RENNES

**LENNIT  
POBL VREIZH**

Kuit da goud ruz er gouarn-mañ,  
gwlit heb dale  
**Eujen KEMENER**  
e Tre-Laouenan  
(etre Kastell-Paol ha Landi)  
pellg. 69.98.98  
pe e Brest (Str. Villeneuve)  
pellg. 02.02.60  
Fuel a vezo degaset deoc'h kerkent,  
lakaset ho tommeres-kreis e doare  
ha riaset ar siminal  
Arabad mogedil hor bro, na dispign  
arc'hant dre ziewezh



**AR MARW :  
UN DISKOULM D'AN DILABOUR...**

Ponner e vez ar bec'h war ziewkoaz-meur a heni. Ne vouse'hoarzh ket ar vuhez d'an oll. Gwazh-a-se d'ar paour, d'an dinad, d'an den dilabour er bed a-vremañ, m'ema an arc'hant ar mestr bras ennañ. E kêr, mes war ar maes iwe, e toug peb heni e samm, e-hunan penn. A-wechoù e vez re bonner ar samm, hag e kouez, pladet, faezhet, brewet, glocset. Ha Samaritan karanteuz ebet da gass ahanoñ-h war gein e jao d'an ostal-ri nesañ...

Brest, ar gêr vras. Ar c'harter hanwet Keliverzan, en tu all da bont an Harteloire. Tiez bras, savadurioù uhel, rann-dier a-vil-vern. 8 000 den dilabour e Brest. N'eo ket enorus bezañ dilabour. Feneanted vrein toud, evel ma lavar lod. An dilabour hag ar vevh ouzhpenn, sed ase ur bec'h spontus, ur gwall vevh...

Ur micherour 9 vloaz warn 20, 'ya re varr e galonad an abardaezh-se eus an 31 a vis Genver : dilabour e oa ; galwet en deus ar marw d'e zisammañ. Mantrussad diskoulm ! Pebezh kevredigezh eo an heni na gennig nemed peuc'h yen ar marw d'ar re flastret gant ar vuhez ?

Pried yaouank ar paour-kaezh paotr-mañ, 3 bloaz warn 20 dehi, he doa hi iwe klasket en em zistruj. Dilabour e oa hi iwe. Savetaet eo bet a-benn ar fin. Ra vo c'hwekoc'h ewit hivisken blas ar bara pemderieg, en desped d'ar doan ha d'he foan, en desped d'ar glac'har aet don en he faour-kaezh kalon.

Ouzhpenn e Breizh hag e Brest ez eus tud dilabour, siwazh ! Ouzhpenn dre amañ ez eo kollet gant meur a unan elfenn ziewañ ar plac'hig dister hanwet esperafs. Ne 'n em zistrujer ket dre ziewezh avad. Dre amañ, evel lec'h all, emañ politikerezh yen ur sistem brein hanwet kapitalism o c'hoari roll an Ankoù, hag o falc'had ar yaouanktoub.

Breizh ur vro eurus ? Breizh ur vro ma vleunio enni laouenedigezh hag esperafs, Breizh ur vro ma vo kavet mad enni blas ar vuhez ? Un hufvire kaër ? N'eo ket : emañ an da-zont etre hon daouarn. Ni d'an nebeutañ e sav bemdez en hon frounelloù froud nerzhus ur vammvro da avelet. Greomp eus hon bro ur da-chenenn eurus war an douar.

M.T. Laot

**TAOLIOÙ  
A WALL-NERZH**

Moned a ra mad an traoù ged ar gwall-nerzh er bed a-vremañ. Hag e vez klevet bermez e-menn e vez ec'h ober e reus. Digoromp ur journal : leun eo ar pajennoù anehoñ ged pennoù a-zivoud ar gwall-nerzh.

Lazhet e vez Alamanted, Palestinis, Arjantinis, h.a., h.a. Doc'h fass ar Vretoned, doc'h fass ar Gornis e vez skopet en ur fesson vil. Digoret eo ar jiboes, ha distaget ar chass.

Mes ne vez ket skrivet peb tra ar journalioù, na roet peb tra da gweled er radio, na diskouezet peb tra ar an tele.

N'eus ket bet lâret dimp biskoazh :  
- penaos emañ bet gwraet e vez d'ar brezhoneg e-barzh ar vered : ne chom mui da c'hortos namaed marw ar paour-kaezh,  
- penaos e vez savet un tamm e poblec'h kreisennou nukleel (Malville, Flamanville, ha tost doc'himp Le Pellerin),

- penaos e vez savet ha disezet kampoù ha kasarnioù ewid an arme (Ti-Vougeret, Larzac),  
- penaos e vez tennet o labour diged ur bochad tud, doc'h o lakaad da vout dilabour ha da vevriñ e kompagnuneh ar vevh...  
- penaos e vez nac'het doc'himp a gomz ar an tale, ar ar journalioù,  
- penaos e vez lakaet ur bochad tud en toullbac'h.

Ya, ar Stad, ar Stadoù a c'hell kempenn taolioù gwall-nerzh en ur ober min da heul al lesonnoù a raont. Hag eh en em strev ar gwall-nerzh ar ar bed a-bezh. Al labourision, ar sitouaned a chom sioual. Didrous ha mud eh assantont o taolioù fall a vez gwraet. Ar gwashañ zo eo e vez gwisket un taol fall e fesson un taol kaër. Ar radio, an tele, ar journalioù zo benweger a boues bras etre daouarn ar re emañ ar galloud gete. Giscard hag e re Frañs, Pinocbet pelloc'h a ou penaos mougiñ mouezh an dud. Fall an traoù ged an demokratiezh er Chili, pendeogwir eno emañ ar fachisted e penn an traoù, mes e Breizh amañ, na boud eh omp gwasket get muoc'h a zouster, eh omp gwasket get sort... Ne vez ket gwraet tammou ged ar frankis.

Y. Marot

**AR SKOLIOÙ A-ZIWAR  
AR MAES  
O VONT D'AN TRAOÑ**



Pa lavar an UDB eus ar vro o koll he nerzh, he gwad, he buhez, ne gont ket gewir. E kreis ar vro dreistoll e ma an Ankoù oc'h ober e reus, press war-nañ gwashoc'h euid pa vez press an eost...

Gant kanton an Uhelgoad eo eus ar poñpoñ, siwazh, war an dachenn-mañ.

En ur ober 20 vloaz ez eo bet diskenet niver ar skolioù eno eus 52 da 28... Ha bremañ, setu reoù all barnet d'ar marv d'o vro : kemennet eo bet gant Ensellezhez Akademiezh Penn-ar-Bed e vo serret ur c'hlass all ban Uhelgoad e mis Gwengolo da zont, hag ive ba Skrignag ; Bremmiliis hag ar Foullbez zo war ar renk ive.

Al lesonnoù Guichard (« grilles » G.) an heni a zo kaos eus an traoñ. Dre ar Frañs a-bezh e vez red sentif doc'h al lesonnoù, ne vern e pelec'h e vezer, pe e Bois-Colombes, pe e Lokmaria-Berrien. Pa vez aet dister niver ar vugaligoù — ha penaos ne yafe ket e kreis ar vro gant an divroañ, an dilabour ? —, e vez serret ur c'hlass, daou, hag ar skol he hunan dindan berr. Neuse e vez kaset ar vugale gant o zud, d'ar chef-kanton tostañ, hag e vezer e-kreis ar « c'helic'h brein ». Ya, « al lesonn zo didreuz ».

Savet o deus o fenn tud ar c'hanton evelkent. D'ar sul 26/2/78 e oant 400 o vanifestiñ, en desped d'an amzer fall : isili eus an UDB, ar PC, ar PS, ar CFDT, ar CGT, ar FEN, ar Feder. Cornec, ar MODEF, hag all, heb

F. Morvanou

**U.D.F.  
pe  
Frañs ataw !**

Kaset ez eus bet newez zo ur pennad da b/Pobl Vreizh gant unan a lavar ez eo « esel eus Burew Politikel an Unvaniezh Demokratel euid Farsal » :

N'on ket laouen o kemenn deoc'h ganeidigezh breer bihan an UDB (Unvaniezh Demokratel Breizh), UDF e hanw (Unvaniezh Demokratel Frañs). N'eo ket normal-tre ar bugelig, peogwir ez eus tri fenn dezañ, med gant un tok hehken, heni presidant ar Republik e hunan.

Diaes eo da gredañ e c'helle ar paour-kaezh bugelig bewañ epad pell amzer. Eürsamant ! Rag dañjerus-kenañ eo sort strolladoù. C'hoant he deus an UDF, sur awalc'h, dispartiañ ar Frañs diouz Breizh, Euskadi, Elzas, Oklania... ha me 'oar son ! Ma Doue ! Petra 'chomo 'benn ar fin ? Daoust hag-erñ e vo graet brusunnoù gant hon bet, met ha peurbadus ? Pebezh treset !

Med, forzh penaos d'labourer, boan ober gwad fall memorañ, rap... Chire ha Debrak war abañ, o vevad-erñ e peb lec'h, sikouret ur vro... E amzer gant Marchand ha Mitterrand, gwir eo, 'n deus roet d'ar « d'ober an droed da gakerikotio en us-duk... » (vel...)

S. Hag L. Frañs

**ENKLASK WAR AR  
C'HEMBRAEG  
E SKOLIOÙ  
EUS KEMBRE**

Nevez eo ez eus bet graet un enklask e skolioù kentañ derez eus Kembre (kon-telezhioù Gwynedd, Dyfed ha Powys) war implij ar c'hembraeg. War-dreñ eo aet ar yezh e Gwynedd hag e Powys, hag o oa arag kornioù ma oa kreñv ar c'hembraeg anve.

Ma talc'h da zigreskiñ niver ar vugale o komz kembraeg, e tigrsko iwe, a-benn un nebeud bloavezhioù, niver ar re a vo barreg da gelenn ar yezh.


N'eus ket bet graet trawalc'h euid deskif kembraeg awalc'h d'ar saosgerien, dehe da c'hellout komz kembraeg e peb degouez.

N'eus nemed e Gwynedd ma 'z eus ur politikerezh a-du gant ar c'hembraeg (re-net eo kusul Gwynedd gant broadelourien Plaid Cymru).

Red eo llaed avad eus ar war gresk niver ar skolioù kembraeg hag ar re a zesker kembraeg enno.

L. Guillaume


**DEWEZHOURIEN AR BED MODERN**



Daw eo bezañ bouzar ha dal, a lâr ar CFDT, euid nompas kompren abalamour da betra e rekour ar batronez d'ar sistem interim :

- gouest int da dorriñ ar c'hontrad n'eus forzh pevare,
- paeet e vez an dud d'an eur, sed e kollont arc'hant pa vez ur « pont », pa vezont en em gavet en o flass gant dale, ha pa vez dewezhioù kofhe,
- emglevioù emsavoc'h « conventions collectives » an usinoù lec'h ma vezont o labourad e vez nac'het oute,
- droukturerezh pe chantaj a vez graet dalc'hmad d'al labourerien interim, en ur brometiñ dehe bezañ kemeret da vad gant ar sossiete, peotramant ar c'hontrol, bezañ lissafiet ma ne chomont ket trankil,
- lakaeet e vezont d'ober labourioù diaes ha dañjerus ; un war benn gloaset diwar un aksidant labour zo al labourer interim,
- hag euid echuiñ, klask a ra ar batronez dre gemer labourerien « interim », brewiñ ar grevoù (pezh a ya eneb al lesonn 1972 diwarbenn al labour « interim »)

Etre 200 ha 250.000 den a vez implijet gant sossieteoù « interim » e Bro-C'hall a-bezh. Trawalc'h euid kompren buan poues bras ar sort implijamant war dachenn « marc'had al labour ».



Newez zo e krede rener ur sossiete « interim » eus Brest llaed e selle-douzh toud an dud dilabour evel klantet possibl e stal. Ne faete ket dehoñ koulskoude roñ statistikoù diwar an dud implijet gantañ deb sizhun.

Kontañ a ra CGT Brest avañtur ur micherour brestad bet lissafiet gant e batron, kemeret diouzhtu gant ur sossiete interim ; ha setu ar micherour kaset kerkenet da labourad bar memes usin, euid peurechuiñ al labour bet kornafiet gantañ du-se arag bezañ plantet 'maes.

Sort buhez a vo heni ar re a labourad euid sevel e form radoub a Brest. Ur bern tud — 300 marteze — a vo implijet gant ar sossiete Fougerolles euid labourad war ar form-se : labourerien interim a vo al lodenn vrasañ aneho. Nos-deiz e vo poanet (an 3 x 8), hag euid mont buannoc'h, en hanw ar profit daonet, ne vo ket taolet kement-se kont deus ar sekurite. Ped micherour 'vo gloaset, 'vo lazhet marteze kehid ha ma pado ar santler ? Ur pris re uhel zo bet paeet dije euid lardañ ar re binwidig, toud mignoned da v/Barre, Giscard, hag all...

Hiziv muioc'h euid biskoazh eo deuet ar mare da chañch penn d'ar vazh da vad, euid echuiñ gant ar varc'hadourien tud, ingal pessor tud e vezont.

Y. Al Loe



Eizh sossiete sort-se a oa ba Brest daou vloaz zo ; etre daou-zeg ha tri-wec'h zo bremañ : kresket eo bet o niver gant kresk an dilabour. Hervez ur sondaj bet graet newez zo, 51 % deus al labourerien « interim », n'eus forzh pessor oad e oant, a oa heb labour arag mont da glask labour ba ur sossiete « interim » ; 50 % a soñj dehe ez int falloc'h gwelet euid al labourerien all. 68 % aneho a soñj dehe n'eo ket ken aes dehe kaoud savidigezh (promotion) ha ma vijent bet en ur plass-labour all, unan stabil.

Euid ar CGT, « al labour interim zo koule ha dilabour », memes ma 'n em gav ar vicherourien-se heb labour nemed ur wech dre vare.

**RADIO - U.D.B.  
Tel. (16.98) 80.18.47**

E. B. V. 1978

## KENTAÑ MEETING BRAS AN UDB



Yvon Babilie

E Roazon eo bet graet, d'ar sadorn 25/2/78. Goude bezañ bet manifestet dirag hag e diabarzh Ti FR3 Roazon (gwe-  
lit hon pennad p. 8), ez eo aet re an UDB  
hag ar re o oa deuet da Roazon galwet  
gant, betek koku kozh leurgêr al Lissou.  
Eno eo bet gwelet petra eo deuet an UDB  
da vezañ en ur ober 14 vloaz. Ya, 14  
bloaz zo eo bet savet an UDB, gant 17 a  
dud. 17 esel en UDB e 1964, 1700 e  
1978 : n'eo ket re fall all. En desped da  
genent a vez graet ewid klask mougañ  
mouezh an UDB, ewid klask he diste-  
raod, ewid klask lakaod anhi war renk  
paotred an tervhadennou...

Wardro 3000 mil a dud e oa dindan ar  
c'hozh. Tud yaouank dreistall, tud  
eus an UDB, ha tud n'emaint ket an UDB.  
An heni a oa lomm e zaoulegad a c'helle  
gwelad iwe, e korn pe gorn, unan pe zaou  
eus veleget e oa kont gant strollad em-  
renerzh Vreizh, diasezet gant o mallozh,  
hag aet war-raog an desped d'o c'hunu-  
jennou ha d'o mouzherzh...

N'omp ket bet diasezet evad war rowi-  
noù an Emsav kozh. E plass tud e'n em

lakaod raktal da « bennererien » ha da  
vistri diharz o galloud — sañset —, hon  
eus bremañ ur strollad frammet, o vont  
en-dro dre an demokratezh, an dilennañ,  
ar brasañ niver a vouezhoù. Ur strollad  
diasezet e pewar c'horn a Vreizh hag an  
diavaez. Ur strollad degemeret pe, d'an  
nebeutañ, toletet gant ar strolladoù all,  
re an tu kleiz hag all.

Gant Jilji Servat, ar c'haner brudet,  
esel eus an UDB war ar mamas tro, eo  
bet digoret an abadenn. Klostet eo bet  
gantañ iwe, wardro 23<sup>h</sup> 30, an dud o ka-  
nañ pos kentañ Bro Gozh Ma Zadoù hag  
ur pos pe zaou eus an Etrevadeg.

Otrokirri e-leizh, leun a dud, a oa dere-  
det da Roazon eus Brest, Montroules,  
Kemper, Landreger, Sant-Brieg, An Oriant  
kenkouz vel eus Naoned.

Graet eo bet epad ar meeting ar gont  
eus taolioù kêr an UDB en ur ober 14  
vloaz. 8 a dud zo deuet da zisplegañ dirag  
an oll, e galleg, e brezhoneg, pehini eo  
buhez pemdezeg ar Vretoned, gwasket  
gant an divroun, an dilabour, an diessa-  
mañchoù war ar vicher.

Emaomp o kennig da bobl labourerien

Vreizh un hent trema ar sosialism hag an  
emrenerzh demokratel : gant ar re-mañ  
o daou e vo savet da labourerien hon  
bro, ha raet dehe an tu da gemer ar gal-  
lout en o bro.

Deuet eo iwe war ar leoronn vras ar 14  
kandidat bet o kaball, gant o 14  
supleant, da geñver votadegoù mis  
Meurzh (gwelit ar foto amañ a-us). Hu-  
chet zo bet dehe gant lewenez, raet zo  
bet kalon dehe gant strakal an daouarn  
dehe. An Telegramme e hunan (27/2,  
p. 3) en deus kavet « sebezhus » (im-  
pressionnant) noswezh laouen ha nerzhus  
an UDB e Roazon.

Emaomp dalc'hmad war an dachenn, o  
kennig d'ar Vretoned an eürusted en o  
bro. N'omp ket distrujerien, mes, er  
c'hontrol, tud o sevel, o tisezañ, o ver-  
nial maen war vaen da lakaod sevel un ti  
novez e-barzh ur vro diskaret.

Ema fin ar c'hantved o tostaod... 14  
vloaz emañ an UDB o turkañ. Turkañ 'ray  
c'hoazh. Ne vo ket mouget he mouezh. Re  
an UDB n'int ket tud pladet ha dañv.  
Gorw, digabestr ha leun o nerzh, emaint o  
fringal e-barzh ar gompenn...

### PREZEGENN DANIEL GIRAUDON, DANVEZ-KANNAD UDB DA LANNUONIS D'AN 18 A VIS C'HWEVRER

D'an 18 a vis C'hwevrer diwezañ e oa deuet Strollad Karaes ha Strollad  
ar Vro-Bagan da c'hoari Piknik 'pad ar bresel ha Ma c'helljen-me kanañ  
Isouen dirag tud Bro-Dreger. Urzhiat e oa bet an traoù gant UDB ha setu ar  
c'hornzoù a lavaras hon kamarad D. Giraudon.

Mignoned ker,

Emaoc'h o paoues gwelout pegen  
genaoueg ha pegen dañjerus e vez  
mont da biknikañ pa vez ar bresel o  
strakañ partoud.

Ma oa dañjerus gwechall, aezet eo  
krediñ n'eo ket aet an traoù war well-  
laad, pa gomzer dimp bremañ eus  
Bombes Atomik, nukleer pe me oar  
petra c'hoazh ! Plasset mad abominab  
omp amañ, peogwir eo en Breizh, ha  
pas lezh all, eo bet diviset gant gou-  
arnamant Paris diasezañ toud e oust-  
tihan a savw.

Ha t'noù, war a seblant, a gav se  
med. An Aotrou Marcel Dassault,  
evad a toud e genorted eus an  
R. F. D. G., a gav evlese un tu dispar  
d'ar c'hozh, godelloù paotred an Ar-  
c'hoazh.

Ar c'havel tud ar PS hag ar PCF a  
oas an amañ kasel-ha-kasel gant an  
UDB. N'as ket pell 'zo c'hoazh o deus  
cheñchet tu d'o chupenn a-greis-  
toud !

Ha setu bremañ UDB he hunan  
ewid final a boues penn, ewid lava-  
roud « Nann ! N'ous buhez ebet da  
savo diwar toud an diotachou-se ! »

Kement-se zo gwir ewid toud al la-  
bourerien eus ar Frañs, med gwiroc'h  
eo c'hoazh ewidomp-ni, Bretoned, pa  
weler e ketone stad glac'harus eo  
kouezet ekonomiezh hon bro. En  
Breizh eo e vez kavet ar muiañ a dud  
en c'homaj !

Kantvejoù 'zo emañ ar Vretoned o  
poñtal hag o vevañ war an douar-  
mañ, hag an an douar-mañ zo dehe !

#### MARVAILH

EWID UN AMZER-NEWEZ

Ur wech e oa an douar  
Ur wech e oa ar mor  
Ur wech e oa ar neñhier ar c'harreg ar  
c'hoajoù dan he du  
Ur wech e oa ur bobl  
War hanter fur  
War hanter lu  
Ur bobl a-ouenn gant an ewel  
Ur bobl trac'het  
Ur bobl isal  
Ha koutskoude uhel he sell  
Ur bobl feizteus  
Ur bobl maen-groun  
Ha dour-stivell

Distagañ a rae heñv-gouañv  
Gerioù ken prim gerioù ken skañv  
Gerioù ken skañv gerioù ken kêr  
Ha pichoned un evnataer

Ur wech e oa, kreis ha nec'hamant  
Ur bobl o komz  
Ur bobl o pariant  
Herwez he soñj herwez he c'hoant  
E-kreis un desarzht dre ha lann  
Un desarzht dre ha balan

E-kreis ar brag'har hag ar joe  
Ur vouezh e oa !  
Ur wech e oa...  
Hag ur wech e vo edarre  
Ma ouomp oil ober eus se.  
Klaoustra !

Yann Ber Piriou - 18.XII. 1977

## AIR RHUYS, un evn oadet un tenn en e askell...

Diviset en deus kusul ti-kêr  
Gwened chom heb roñf un dornad  
argant da Air Rhuys ewid ar blé  
1978... E'ld PDG ar gompagnuezh-  
se, an Ao. Ayroult, emañ bet un taol  
kountell en e galon an divis-se o gêr  
Gwened...

Ha neozh da betra e servij ar  
gompagnuezh kirri-nij Air-Rhuys ?  
Da zegas touristed pinwidig korn-  
bro Paris bete « magoerion newez »  
Kerjouanno.



Bezomp war ewezh neuse, migno-  
ned ! Emã Paotr-e-Falc'h o klask en  
em silañ en hon toues !

Emã an Ankoù o klask boutañ aha-  
nomp e-maes eus Bro hom zadoù !

Ma !  
Paotred an UDB o deus graet o soñj  
en em gannañ hag e lavaront d'an  
Ankoù :

« Bout ! Bihan ! Bout  
Med kêr 'po boutañ  
Diskroffomp ket eus an tamm douar-  
mañ ! »

Emã pobl Vreizh o tihuniñ goude un  
hir a gousk. En ur votañ ewid kandida-  
ted an UDB e mis Meurzh da zont, e  
tskouezfomp splann da c'houarnamant  
Paris n'omp ket prest da dilojañ  
eus Bro yaouank hon bugale !

Kenavo, mignoned, ha chañs  
deoc'h da welout sklêr pa vo deut ar  
c'houlz.



Ne vez ket gwelet ur bochod mi-  
nistred e-barzh ar c'hornad-mañ, er  
more-mañ. Perag nompas sevel ur  
gompagnuezh Air Karneg iwe ? Emã  
an douristed pinwidig ec'h ac'hubiñ  
ar vro en he fezh...

Sellit. Kastell Tredion, og ar 15<sup>e</sup>  
kontved, e vo gwraet ur « résidence  
super-luxe » anehoñ : 2500 L ar  
sizhuniad e'ld un den ; n'eo ket fall.  
Boud zo pichoned da zibluñ, sur  
mod. Er vuhez emañ red nijal uhel, ha  
nompas chomel, a res d'an douar,  
e-mesk ar saout e peuriñ.

An Ao. Ayroult n'eo ket nec'het  
bras ged Smikarded Breizh, na ged  
an dud dilabour a zo dre amañ.

Diwar « Ar Baned Ruz », kinnadeg  
kevrenn gwened an UDB

**N'eus ket a zemokratiezh...**



Yvon Boelle

er Frañs, bro ar frankis sañset. Emaomp en ur vro ma vez graet van d'ober ur bern traoù, ma vez graet van da heuliañ spered an demokratiezh. Graet van, ha mad pell zo. E gwirionez en un demokratiezh vourc'his eo emaoomp. Derc'hel a raer d'ober peb tra ewid roñ ar galloud d'ar vourc'hisien dalc'hmad; ewid se eo graet an « demokratiezh ».

Pebez farsadenn eo bet ar « c'hampenn » bet graet d'an tachennoù-votiñ gant de Gaulle gwechall ! Ewid diaessaad e jeu d'an tu kleiz e oa bet graet kemend-all : n'eus ket bet graet netra, war-aeun, a-eneb d'an « demokratiezh », med piw'grede lãred ez eo « demokratel » doareoù ken divvezh ?

Dalc'hmad e vez kavet un digaraz bennag da gass ahanoc'h da bourmen... Pa oa krogad ar votadegoù o tostaad, o doa re an UDB goulnet digant re FR3 Roazon, — France-Régions ! soñjit —,

bezañ aotreet da gaoud un troc'had amzer, evel ar strolladoù all, war ar radio hag an tele.

N'eus bet netra d'ober. Al lesenn eo al lesenn. Faotañ 'ra kaoz 75 kandidat. Na boud ne c'hell an UDB kaoz nemed 33 d'ar muiañ, peogwir ez eus 33 tachennoù-votiñ e Breizh, n'eus bet netra. Setu, eveljust, ez eo lakaet an UDB disterroc'h ewid n'eo-hi.

Aet skuizh gant doareoù ken vil ha gant digarezioù ken toull, o deus diviset re an UDB ober ur vanifestadeg vras e Roazon d'ar sadorn 25/2/1978, dirag ti ar Radio-Tele FR3, bd Janvier hag en diabarzh iwe. « Sitting », dibunadeg e kêr, un drugar eo bet gwelad pegen braw eo deuet he zaol gant an UDB.

Aet eo goude-se ar vanifestanted beteg leurgêr al Lissou, e-lec'h ma oa meeting bras an UDB da vezañ.

**ARC'HANT DA ZIFENN AR GALLEG A VEZ KAVET DALC'HMAZ**

Dalc'het hon eus soñj en doa ranket René Richard mont kuit diouz FR3 n'eus ket pell zo, dre ma ne oa ket arc'hant awalc'h ewid poañ e labour dehañ.

Arc'hant zo bet kavet koulskoude ewid skignañ programoù galleg en tu all d'an Alpoù, e traonienn Aosta, e Norzh Italia.

Ewid difenn ar galleg hag astenn e rouantelezh, e vez kavet arc'hant dalc'hmad.

N'eo ket heñvel an traoù ewid yezhoù « romanvoel » ar Frañs. Evelse 'ma kont e bro gwirioù mat-den.

L. Guilleme

**LENNIT POBL VREIZH**  
**RADIO - U.D.B.**  
 Tel. (16.98) 80.18.47

— SCOP — C O D A —  
 Tommeres.  
 Tredan (elektirisite).  
 plombiri - salioù-dour -  
 awelliañ ar stalioù labour-zour  
 Oc'h ober wardro ar binvioù  
**Westfalia ho Separator**  
 Enesenn Vihan  
 29212 Ar Vourc'h-Wenn  
 Pellg. 845730

**Un ti-kenwerzh hebkén e GWENED e'id an dilhad gis Breizh**  
 (kabiqoù, mantill glaw hag all, jiletannoù martolod)  
**TI AR C'HABIG**  
 8, r. René-Rogues

**Komanantit da b'Pobl Vreizh**  
 Ar gelaouenn bolitikel nemeti e brezhoneg penn-da-benn  
 B.P. 304 - 29273 BREST CEDEX

Hanw hag hanw-badez.....

Chomlec'h.....

a gass e gomanant Boutin : 30 L (1)  
 Skoaz : 50 L pe ouzhpenn (1)  
 Estrenvro : 50 L (1)  
 (1) Diverket ar gerioù na serjont ket

Amañ an arc'hant dre chekenn-bast (1)  
 dre vandat-lizher (1)  
 dre chekenn-vank (1)  
 CCP RENNES 2746-79

**HEB UDB BREIZH EBED !**

**BAZHVALAN EN TU ALL D'AR MOR**

Er sizhun all, pa 'm oa un toullad dewezhioù, e oan aet d'ober ur « weldenn » beteg Bro-Gembre, da glask ober an dimeziñ etre kêr Lannuon ha heni b-Vangor. Gwenn-kann 'oa sae ar plac'h newez, rakar ne oa ket bet kemend-all a erc'h du-hant fregont vloaz a oa. Sin vad, kweda? Goude-se oa red din envelket mont da demañ al lesvamm, ha se zo kaos 'm oa sachet ma skassoù beteg Londras. A-hant er Parlamant, 'm eus bet ar blijadur da evañ ur ban-nac'h gant George Thompson, kannad eus ar Scottish National Party, a 'm oa bet gwelad eno tri bloaz 'so (gwelad Pobl Vreizh n° 66). Ha diars 'm oa, penegwir e oa en deuz an end-eeun, ur breud pe un deuz e baous bras diwarbenn an « anglijan » ewid Bro-Skoss (pezh a-hamp-ni emrenezezh pe auto-keñver) roet 'oa lamm adarre d'ar komanant Labour en nos-se ha d'ar k' Skassis eveljust.

— Paour-koazh Skassis, a soñjen-me, ha neuse : Paour-koazh Bretoned !

Rakar, prederiomp doaz vunut war an afer : **Hanterkant vloaz 'so** o deus prometet ha adprometet Strollad al Labour hag ar Strollad Liberal en Breizh-Veur reiñ an devolution-se da dud Bro-Skoss ha Bro-Gembre. Hanterkant vloaz, tudioù kaezh ! Hir eo ar vuoc'h da halañ ! Ha pa soñjer ouzhpenn pegen souplac'h eo bet a-viskoazh ar gouarnamantoù saos e-keñver Kembreis ha Skassis ewid ar

gouarnamantoù gall e-keñver ar Vretoned hag all ! Neuse e c'haller en em c'houlenn hag-eriv eo genaoueg da vad pe dall-mik ar « vro-gourourien » vretion hag a laka o fiziñs er strolladoù evel ar PS pe ar PCF, beteg mont da vezañ isili deus ar strolladoù-se kentoc'h ewid dont en UDB e-lec'h m'emo a fiass. Eweljust zo kenniget bruzhunoù dimp er Programme Commun. Eweljust zo ket komzet gant Mitterrand deus « le droit à la différence ». Med petra eo se e-keñver ar pezh a c'houlennomp, ar pezh a c'hortosomp ? Hag an aluson-se, kredit hardi, a vo stard da gaoud ; marc'hatañ v' d'ober, rakar, petore poues en devo un den a-fesson evel Le Pensec e-barzh ar parlamant ? kasi nul.



N'emaomp ket a folklorisatoc'h ober politik emaoomp.

Ha neuse 'oa kletet hirvoudoù tristoc'h ewid Doue Pleuveur, hirvoudoù mouezhioù o klemm, evel o deus klemmet dalc'hmad hag evel e klemmont bepred, en deiz a hirie a-eneb da Haby pe da reoù all en e raog : « Prometet ho poa, Aatronez pe Kamaroded, ha n'ho peus ket servenet ho promessoù. Diwallit, ar Vretoned na bermetfont ket e ve gwraet gaop aute da viken ! » Allas 'ta, ma Doue ! Doganet vefont beb tro.

Arabad kredif eh afen a-eneb da bolitikezezh an UDB hag a zo bet sklaer a-viskoazh : diskar an tu dehoù er Frañs ha lakaad an tu kleiz e penn. Geo, geo, re bell a zo ema flastret ha moc'het al labourerien hag un tamm disamma digasso dezo ar Programme Commun. Re wir eo. Med ewid pezh a sell gwirioù hon fobl, pobl Vreizh, e vo red d'ar Vretoned bezañ kad da gomz uhel ouzh reoù an tu kleiz gall pa vefont e penn hag ewid se e vo red dimp-ni, UDB, bezañ kreñv, ar c'hreñvañ ar gwellañ. Rakar, a-fass dimp em a stad ar muiañ sañtrall-set en Europa pe memes er bed a-bezh.

N'eus nemed un hent d'ar re o gar o bro Breizh hag he fobl ; dont en UDB, stourm en UDB, ha trec'hiñ gant an UDB. Kement tra all n'int nemed bitrakoù, koll amzer, hag abusetes !

Loig Kervoas, eilmaer Lannuon

**Komanantit da Le Peuple Breton**  
 E galleg penn-da-benn  
 B.P. 304 - 29273 BREST CEDEX

Hanw hag hanw-badez.....

Chomlec'h.....

a gass e gomanant Boutin : 30 L (1)  
 Skoaz : 50 L (1)  
 Estrenvro : 40 L (1)  
 (1) Diverket ar gerioù na serjont ket

Amañ an arc'hant dre chekenn-bast (1)  
 dre vandat-lizher (1)  
 dre chekenn-vank (1)  
 CCP RENNES 2365-76

**Paperenn ewid goulnenn mont e-barzh UDB**

Hanw hag hanw-badez.....

Chomlec'h.....

Goulnenn a ran moned e-barzh Unvaniezh Demokratel Breizh  
 D'an (d ar)..... 19.....

Da gass en dro (trac'het pe adskrivet) da  
 UDB B.P. 304 - 29273 BREST CEDEX





## LABOUR HAG INDUSTRIOÙ E BREIZH !

Pa 'n em gavo an niverenn-mañ eus **Pobl Vreizh** gant hon lennerion, ne vo ket achu c'hoazh gant an abadenn bet digoret tost da c'hwec'h mis so. Nann, ne ouezimp ket c'hoazh gant pere e vo aet ar maout da geñver ar votadegoù : pe gant re an tu dehoù adarre, pe gant re an tu kleiz. Ne ouezimp ket c'hoazh petra 'vo bet deus esperañs al labourerion dre ar Frañs a-bezh, na deus heni labourerion Vreizh is-pissial : lakaet eo bet an trec'h da vont gant an tu kleiz, ma raer diouzh ar sondajoù. Med piw zo gouest da lâred petra 'ray ar PCF etre an diw dro ? Lakaad an traoù da c'hwitañ da vad, ha gortos 1983! Pe tapoud krog e-barzh ar stur gant re ar PS ha re an MRG, ewid digoriñ an hent d'ar sossialism, ma ne c'heller ket henn diasezañ da vad diouzhtu c'hoazh.

Ne ouezimp ket kennebeud petra 'vo bet eus taolioù-aessae an UDB ewid digoriñ an hent d'an emrenezh ewid Breizh, ha d'ar sossialism war ar memes tro...

Kement ha gortos neuse petra 'ziviso ar « bobl soveren », kement ha gortos petra 'ziviso dreistoll pobl Vreizh, hag hi sujed ha tamm ebed soveren ewid c'hoazh, taolomp ur sell ur wech ouzhpenn war stad hon bro Vreizh.

Pa vo paouezet da derzhienn ruz ar votadegoù, e chomo Breizh evel m'ema moarvad, gant he c'hudennoù, dalc'hmad memes re : an dilabour, an divroañ, an diouwer a industrioù hag a ekipamantoù...

Zokén, ya, mar gwelomp an tu kleiz gall o vont e-barzh, — hag e raimp kement a zo red ewid se —, ne vo ket savetaet Breizh gant **Mitterrand, Marchais** hag o re ken aes ha ma lârer : koukou ! Hag eveljust ma vez tapet ar stur gant re an tu dehoù, e talc'ho Breizh da



vont gwashoc'h-gwashañ war he diskar.

Forzh peheni e vo an disoc'h eta, e talc'himp, evel ma talc'homp bre-mañ, da c'houlenn stard ha groñs industrioù hag labour ewid Breizh hag ar Vretoned.

Epad ar c'hrogad-mañ, hon eus darempredet a-dost hag aketus tud hon pobl Vreizh. Gwelet hon eus anehe bemdez-Doue epad tost da dri mis. O gwelet hon eus, bew, nerzhus, kig hag eskern. E oant, emaint ataw o klask gweled o bro chom en he sav. Emaint o c'hortos ar chañchamant bras a dorro, a vrewa al lañs spontus a zo o kass ar vro-mañ d'an traoù.

Ped parres, ped kanton eus kreis ar vro a weler war o zremenvan ? E kêr iwe ema an dilabour oc'h ober e reus, hag o waskañ ar re yaouank

dreistoll, pe ouzh o lakaad da vont kuit.

N'eo ket bet industrialiset Breizh p'eo bet graet ar c'hornioù all eus Europa, ar re a zo bet graet. En ur c'houlenn labour hag industrioù ewid Breizh, ne raomp nemed goulenn hon dleet, hag eñv o tont gwall ziwezad, mar bez roet dimp.

Dalc'homp soñj. En ur votiñ hag en ur lakaad ar re all da votiñ ewid an UDB da gentañ, ewid re an tu kleiz gall d'an eil tro, n'hon eus ket disoñjet ne c'heller ket saveteiñ Breizh hon bro, heb roiñ dehi an tu da gemer ar stur, da dapoud krog e-barzh. Ar Vretoned mestr war o aferioù, n'eus diskoulm all ebed.

